


BUEZ
Sant Tenenan
hag histor
PLABENNEC



G. M. LE JEUNE, né en 1844.

Sous-Lieutenant en 1870-71. Prêtre en 1879.

Pèlerin à Rome et à Jérusalem en 1888. Recteur de Molène 1892-98
et de Henvic 1898-1917.

BUEZ

70559

Sant Tenenan

hag histor

PLABENNEC

Great gant G. V. ar Yaouank, beleg.



FB
249.
5
TEN

TOURS

ANCIENNE LIBRAIRIE ALFRED CATTIER

MARCEL CATTIER, ÉDITEUR

1918



NIHIL OBSTAT,

14 octobre 1916.

L. ROSPARS, chan.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 14 octobre 1916.

A. COGNEAU, vic. gén.

Plabennegiz va c'henvroïz

Oveza m'oun ganet enn ho touez, habet, 13 vlvaz kure enn ho parrez, em euz gullet ha desket aleiz a dravu kag a vje mad da lakât el leor-mâ. Sivuaz ! al leoriou braz a goust ker, 'hag ann historiou hirr a gaver inoüs. A leor-mâ a vezo'ta bihan ha berr. Divezatoc'h pa zaï guelloc'h ar bed enn dro, e vezo gullet ober brasoc'h ha kaëroc'h. Evelato e kinnigan d'ehoc'h va zammik labour evel eun testeni euz va c'harantez evidoc'h. Her c'hinnig a ran, dreist holl, d'ann Aotrou Gauthier, hirio Persoun Kerlouan, en doa bet ar vadelez d'am lakât var ar studi ha d'am c'has da veleg pa edo kure e Plabennec. Goude-ze oun bet kure asamblez ganthan amâ epad tri bloaz.

G. V. YAOUANK.



M. B. GAUTHIER,
vicaire à Plabennec (1867-1882)

Breman leorik, kea d'ann tiez,
Kerz dre bevar-c'horn ar barrez,
Ha desk d'ann holl, braz ha bihan,
Histor parrez sant Tenenan.

Gwechall-goz

Ar brezonek a zo unan euz a iezou kosa euz ar
bed. Dont a reaz gant hon tud koz pa deujont euz
ann Azii d'ar vro-man. Hanvet oant (*Celted*) pe
Gallaoued-Koz. Lod anezho a dreuzazaz mor evit
mont da Vro-Zaoz, hag a gasas di ar brezonek.
Abaoue e kendalher ato da gomz brezonek emeur
a garter euz a Vro-Zaoz hag euz ann Irland pe
Iverson, bro sant Tenenan.

Bro-Zaoz ha Breiz-Izel n'int Ket bet ato Kristen

Enn amzer goz hin Arvor
A ioatenval maro,
Satan en doa he gador
E skeud ar gwez dero

Ann Arvoriz a veve
'Kreiz ann denvalijen,
Pep tra dezho ioa Done
Nemed Doue hebken.

Beleien faoz ho relijion baian ea ann Drouiz.
Trugarekaomp ann Aotrou Done da veza digaset
arguir Feiz enn-hon touez. Hiviziken ne vezo mui
klevet kriaden ann dud keiz o vervel var ann *dol-ven*
dre gontel-laz ann Drouiz. Relijion hor zalver a zo
eul lezen a garantez.


Araok daoulina dirak Kroaz Jezuz-Krist, ar Vre-
toned a rankaz soubla d'an Drouiz ha d'ar Romened
deuet er vro-man da ober ho mistri. Kalz merkou
a veler c'hoaz lezet gantho er vro. Evelse e Ke-
rangeven er bloaz 1882, ez oa eur peul-vean en eur
voarem. E park ann dorgen, er Penker, ez euz eur
bez paian. Er mogerou, hag en Evlec'hen, teol ha
traou-all bet d'ar Romened.

Erfin e plijaz gant Doue digas beleien katholik
d'hor bro.

Koulsgoude ar relijion gristen ne deuaz da veza
krenv aoualc'h e Breiz-Izel, nemet pa deuaz me-
nec'h, pe ermited santel euz an Irland pe Vro-Zaoz
hanvet enezen ar Zent. Diez eo gouzout pegement
a dud a deuaz ac'hano da Vreiz-Izel.

N'onffen ket niveri
Jaona, Paol, ha Tenenan,
Sane, Guesnou, ha Majan,
Gwevroc, koulzha Sezni,
N'onffenket niveri.
D'ur mareou-ze, ann Aviel,
E Bro-Zaoz, hag e Breiz-Izel,
A voe e brezonek prezeget
Gand ar zent braz d'ar Vretoned.
Velse, brezonek ha Feiz
A zo breur ha c'hoar e Breiz.

Sant Jaoue a ioa niz dazant Paol kenta eskop
Kastel. Sant Tenenan oue ar pcmpct enn he c'houde.
Buez ar Zant-man a oue s'krivet hirr, e kazeten
Feiz ha Breiz, en bloaz 1870, gant ann Aotrou Goul-
c'hen Morvan euz ar Forest. Er bloaz 1884, Aotrou
Morvan Tremeur a reaz eun all berroc'h. Er me-
mez bloaz, G. Milin euz Enez-Vaz a scrivaz ar vuez
e gverz, guelit p. 20.



STATUE DE St THÉNENAN
Fondateur et Patron de Plabennec,
mort Évêque de Léon l'an 635.

CANTIC SPIRITUEL

VAR BUEZ

Sant Tenenan, Eskop à Leon

Patron a Barres Plabennec

*Var ton Ma vez canet ar Gommunion spirituel e
Retret Brest, pe var ton Guerz S. Guillerme.*

Tud devot, Christenien fidel,
Selaouit ur c'hantic santel
Inspiret gant ar Speret-Glan,
En enor de sant Tenenan.

Selaouit c'hui Plabennegis,
Person eo bet en hoc'h liis ;
Selaouit oll, pobl a Leon,
Eskop eo bet en ho canton.

Euz an Irland oa guinidic
A guerent nobl ha pinvidic.
Kentelliou hac exemplou mad
En devoe a-berz mam ha tad.

Kenta ma oue'n oat da ziski,
Et voe lakeat var ar studi
Dindan eun den fur a veleç,
A reat aneza Carantec.

N'en doa quet accomlisset c'hoaz
An oat eveuz a drizec vloaz,
Na doa parfet er skianchou
Ha parfetoc'h er vertuziou.

Casset oue, evit heul he stad,
Da Lez ar Roue gant he dad,
Ha ne oue guelet courtizan
Er palez par da Denenan.

Estimet oa gant ar Brincet,
Caret gant an itronezet,
Hag azveulet gant ar bed oll,
En danger, sioaz ! d'en em goll.

Mes a greiz kaloun da Zoue,
Bemdez en em recomande,
Hag e c'hounezaz eur victor
Din a veuleudi hac enor.

Eun Demezel, merc'h eur Gontez,
Plac'h a enor d'ar Rouanez,
N'alle ket en em gontanti
D'he velet ha d'he gontempli.

Eur bennerez oa, n'e doa manc,
Caer ha pinvidic, ha iaouanc,
Hag he sonj a lakeaz ennan
Ken a zeuaz folles anezan.

Ar Gontez, o klasq angaji
Honñdijentil d'he eureuji,
Offrou, gourdrouzou, kement zo,
A glascas evit he zeseo.

Mæs, palamour m'en doa gret le
Da viret ar virginite,
E kemeraz evit armou
An oræzon hag ar iunou.

Digant Doue e reketaz,
Euvel eur c'hras ha faveur vraz,
Ma teuje da goll ar genet
A ioa caos m'az oa ker brudet.

Souden e obtenas he c'hras,
Lor e parissas var ar plas,
Hag an tan a vougas a grenn
E creiz calon ar femellen.

Neuze oue libr dezan kuitaat
Euz ar plæez da di he dad,
Ha gant poan oue anavezet
Gant he dud, kement oa chenchet.

Charmant oa clewet Tenenan
Ouz ho c'honsoli e-unan,
Ha guelet ker brao dijentil
Ker contant gant eur c'hlenvet vil.

Eun deiz, goude he oræzon,
E couezas en eur c'housket don,
Hag oue inspiret gant eun Æl
Da vont da gaout he vestr santel.

Carantec a ioa kelennet
A-berz an Env euz he glenvet
Hag eur remed en devoa great
Evit e renta iac'h ha neat.

Evel ma sonjas touch ounta
D'he voalc'hi ha d'he barea,
He glenvet a zisparissas
Hag ho lezaz en eur joa vraz.

Neuz' en em strinkas dan daoulin
Dirag ar Vajeste divin,
Gant soursi da drugarecat
Eun Doue ker fidel ha ker mad.

Tenenan a reas adarre
Vœu da viret ar chastete ;
Hag evit renons crenn d'ar bed,
Belec en em rentas abret.

P'edo guir vella en he vro,
O prezeg ar feiz tro var dro,
Euu Æl a zigassas deza
Urz da guitaat, da guimiada ;

Da vont da gundui an denvet
En doa bet sant Paol gouarnet,
En eur c'harter eveuz a Vreiz,
El leac'h na vank james ar Feiz.

Ar zant, kerkent, evit senti
Ouz urz an Eê, hep ken soursi,
Gant bennoz he vestr Carantec,
A ambarkas gant daou veleç.

Setu hj o sevel goel
Da vont e-trezeg Breiz-Izel ;
E costez Leon eo ez ijont,
Hac e rad Brest e antrejoint.

Poulzet ouent gant eun avel gre,
Ractal, e canol Landerne
Ken a errujont gant ho lestr
Dirag Castel-Gouelet-Forest.

D'ar poent-se, an Danemarkis
A rea droug braz da Leonis ;
Mil grueldet dezho a reent
Ha den ganet ne espernent.

An dud o chom en ho ziez
Ne doant ket sur euz ho buez,
Tec'het a rent a vandennou,
Darn er c'heriou, darn er c'hoajou.

Forz tud a ioa en em daolet
E coat ar Forest da guzet,
Hag er C'hastel e lekeant gued,
Gant aon ne vijent surprenet.

Pa velas 'ta ar santinel
Al lestr o tont eün d'ar C'hastel,
E c'havertissaz a boez-penn :
« Eur sant zo erru d'hon diffenn. »

Ar c'habiten eveuz ar c'hard,
Gant he oll soudardet, hep tard,
A griaz : « Bennoz, en heur-ma,
« D'ar zant a deu d'hon delivra ! »

Pa oa diskennet Tenenan,
Ho c'honsolas holl ker buan,
O prometti abers Doue
Dious pep seurt droug ho difenje.

An dud keiz, gant sourci divoall
Ho c'horf, ho madcu dious pep goall,
O doa lezet en abandon
Deveriou ar Religion.

Ar Zant evit commodite
An offis a servich Doue
Diou ilis a vatissas prest,
Unan e pep penn ar Forest.

Ilis ar Forest oue ar guenta
A gommansas da vatissa,
Goude larcoc'h, en douar braz,
Ilis Plabennec a fontaz.

En daou blas-ma e prezegue
D'ar bopl christen comsou Doue,
Hag e vague o eneou
Dre voien ar sacramanchou.

E creiz etre an diou ilis,
E savaz c'hoaz eun edifis
Pe eur c'hre da ziguemeret
An dud paour ma rancjent tec'het.

E di a vatissas enna,
Gant chapel da oferenna,
Hac e etablissas ouspen
Eul lez da varn ha da guelen.

Ar Varbaret, leun a arrach,
A guendalc'he d'ober ravach;
An oll ilizou a billent,
Ha netra sacr na respetent.

Ar Zant, kenta ma cleo ar brud
E tidosteont var zu he dud,
En em lacas prest e peden,
Hag he oll dud e pinijen.

Eun dijentil a nopla goad,
Gant armou cre, biniguet mad,
A roaz dezo da gabiten,
Evit ho difen hac ho ren.

Ar c'habiten-ma, gant prez braz,
E Plabennec e vatissas
Eun dourel rond, gant e avis,
'Vit recur madou an ilis.

N'oa ket gallet c'hoaz sevel dor
Evit serra var an tenzor,
Na Ziredas ar Barbaret,
Goas evit bleizi arrajet.

Ar c'habiten, pa ho guelas,
En he dour en em renfermas,
Gant eur goz rod, e deffot guell,
E stankas cre dor he gastell.

Goude m'o devoa, e peb guis,
Clasquet e vean, pilla an ilis,
En em doljont da glasq antren
En he dour var ar c'habiten.

Mæs Doue, roue an Armeou
A selaouas ar pedennou
A rea e Lesquelen, dan heur,
Ar Zant gant e vrassa ferveur.

P'edont o clasq forsi an or,
 Evit antren var an tenzor,
 E parissas en ho c'hichen
 Eun arme vras a Gristenien.

Var an tour e veljont ouspen
 Eur c'havalier, var eur marc'h guen,
 O rei courach d'he soudardet,
 Hag eur spont braz d'ar Barbaret.

Souden e kemerjont an teac'h,
 Hep ober arret e nep leac'h,
 Ha pelloc'h, ar ras milliguet
 Var douar Leon ne oue guelet.

An Autronez incontinent
 A drugarekeas oll ar Zant
 Da veza delivret ar vro
 Dious tud ker criz ha ker garo.

O rei da ilis Plabennec,
 Gant eur galon anaoudec,
 Douarou hag heritachou,
 Guiriou caër ha privilejou.

Eur seurt flambos ne dlïe ket
 Chom dindan ar boezell cuzet ;
 Lakeat voe var ar c'hantolor
 A ilis Leon gant peb enor.

Dre ma zoa partout enoret,
 Sant Tenenan a voe choazet,
 A voues an ilis hag ar bopl,
 Goude sant Goulc'hen, da Escop.

E guenta soursi oue sevel
 An templou, ar plasou santel,
 O devoa an Danemarkis
 Pillet, ruinet e peb guis.

Da peb parres e roas timat
 Pastoret ha beleien vad,
 Da sicour cundui an denvet
 En doa dindan cont kemeret.

Cresquet ma oa he zignite
 He vertus a greskas ive,
 Beteg ober miracloù bras
 Ha kent, ha goude ma varvas.

Ker patant voe anavezet
 He santeles, m'e kemeret
 Da Zant en Escopti Leon
 Hag e Plabennec da Batron.

Ar c'huezecvet a c'houere
 An deis ma zeas dirag Doue,
 E rer he c'houel hag he offis
 E calendrier Leonis.

P'eo bet hon tad hag hor pastor,
 Celebromp he c'houel gant enor,
 Hag imitomp he vertuziou
 Ma veritimp he bedennou.

Buez Sant Ténénan

Sant Tenenan, eme'n histor,
 Map prins Hiberni. Tinidor,
 Ha Tinidor ive hanvet,
 Da skol Karantek voe kaset.

Distro d'ar gear da drizek vloaz,
 Great he studi ha desket braz,
 He feiz, e skol ar zantelez,
 A greskaz enn-han pep furnez.

He dad, o welet Tenenan
 Iaouan ha kaer dreist pep-unan,
 He gas neuze da roue Londrez
 Da zeski gizioù 'r bed el lez.

He c'hened eno a baraz
 Hag he feiz kristen muioc'h c'hoaz ;
 En Demezel nobl, Arondel,
 Her c'haraz re hep dale pell.

Out-han kaloun ar plac'h-iao ank
 A stagaz o veza m'oa koant,
 Hag euz he ferz voe goulennet
 Evit beza d'ezhi pried.

Tenenan ne lavaraz ia
 Evit klevet petra ioa,
 Rak da Zoue en devoa gwestlet
 Kaloun ha gened ha guerc'hted.

Evit golei mad he furnez
 E c'houlennaz eur gwisk lorgnez,
 Ha Doue, o selaou he beden,
 A lakeaz heuzuz he groc'hen.

Kaloun an Demezel nobl-ze
 A zistanaz dioc'h-tu neuze,
 Ha Tenenan, laouen d'he vro,
 Da gaout he gerent a zistro.

Euz a zourn Doue tle pep kristen
 Evel dudi kaout mad anken,
 Hag he veuli, koulz er c'hlenved,
 Evel pa ro d'ezhan iec'hed.

Tenenan, o komz evel se
 Oc'h he gerent, ho frealze,
 O lavaret ne dlle klemm
 P'oa bet selaouet he beden.

Doue a zo Tad mad ha tener
Ne zilezaz he servicher
Hag her c'hare dreist kement-zo,
Dreist karantez ar bed edro.

Sant Karantek en doe kemen
A-berz Doue digant en eal gwenn
D'ober louzou a bareje
Tenenan pa en em gavje.

En nozvez goude he beden,
Da Denenan, dre he voren,
Gant en eal e voe lavaret
Mont da welet he vestr karet

Senti a reaz ha mont affo
Da gaout Karantek ac'hano ;
En em gavet enn abati,
Ez eaz d'an iliz da bedi.

Enn iliz gant sant Karantek
E voe kavet enn he zaou-bleg ;
D'he di gant-han hen digasaz
Ha d'ezhan da zibri e roaz.

Goude pedi, dibri en tamm
Gant he vestr santel Tenenan
A voe gwalc'het enn er c'hibel,
Ma teuaz flamm'vel er bugel.

Kement-ma d'e-hoc'h tud a Vreiz,
D'e-hoc'h Forestiz ha Leoniz
A ziskouez, dre skouer Tenenan,
Eo red kibel da bep-unan.

Dioc'h al lorgnez zo ar pec'hed,
Eo red d'ann holl beza gwalc'het,
Rak nep n'eo glan ne vezo sant ;
Beza dibec'h zo dreist arc'hant.

Oc'h pep kleñved, gwella louzou
A zo pedi enn ilizou,
Pedi gant karantez ha feiz
Doue, ar Werc'hez sent hor bro Breiz.

Tenenan deut iac'h ha pare
A ia d'an iliz adarre
Da bedi Doue gant Karantek,
Ho daou ho c'haloun anaoudek.

An daou zant, goude pedi Doue
Gimiad an eil dioc'h egile,
Ha Tenenan war-zu he vro
Da gaout he gerent a zistro.

Kresket he feiz hag he iec'hed,
Tenenan a labour he spered
Evit kas he vennoz da-benn
Ha dilezel ar bed a-grenn.

En eal d'ezhan en em ziskouez
Hag a lavar gant azaouez
Eo bet kavet mad he vennoz
Gant Doue, he Dad, er Baradoz.

War gement-se ranke farda
El lestr d'en digas d'ar vro-ma.
Bro St-Paol a Leon hor bro Breiz
A dle padout enn-hi ar feiz.

Tenenan laouen pa glevaz
War he lestr fardet a zavaz
Gant beleïen, Senan, Kenan,
Ha gant re all c'hoaz ne hanvan.

Lestr Tenenan, digor he c'houel,
A red, a nij gant an avel ;
Tost eo d'an Arvor, d'hor bro Leon ;
Ra drido laouen hor c'halon !

Tud ar Forest, sellit a bell,
Emulgul mor Brest ha c'houi wel
Gouel Tenenan o tispaka,
O tont da ziuall ar vro-ma ?

Ema o tont er ster Elorn,
War warren stur he lestr he zorn,
Ec'h harp a-zirak ar c'hastel
Digor d'ar geiz he borrastel.

Di oant deut'raok an Normanted,
Tud dirollet ha dizakret,
Ne reant nemet laerez, laza
Kement a c'hellent da baka.

Pa wel ar c'hoard lestr Tenenan,
E kri oc'h Breiziz : deut, deut buan
Da welet ar servicher Doue
Hor savetaï korf hag ene.

Ar c'habiten hag ar re all
Pa glevont a zired raktal
War ar mogeriou da welet,
Ha pa welont int estlammet.

Neuze laouen ho c'halounou,
Ken a dregern doun an aojou
E krient holl a-bouez ho fenn :
Meulet hon Doue ! Bennoz d'an den !

Tud goëled Forest souezet
Gant al levenez a glevet,
Lavare hep goût petra ioa :
Er goard ez euz meurbed a joa.

Meurbed a joa ez euz er goard
Voe hano *Kastel Joaïuz* goard
Dalc'het e iez ar Challaoued
A lak ar brezounek trefouet.

Sant Tenenan deut euz he lestr,
Diskennet e goëled Forest,
A voe digemeret laouen,
'Vel en tad, gant ar gristenien.

Kredi a reant voa digaset
A-berz Doue d'ezho diskaret
Gant an nec'h ha gant ar poaniou,
Abalamour d'ho fec'hejou

Ar zant, pa welaz dilezet
Ar feiz kristen 'vit traou ar bed,
A lakeaz sevel diou iliz
Evit mad ar gristenien geiz.

Unan anezho voe hanvet
Iliz kastel goëled Forest,
Hag eben e penn all ar c'hoad
He hano iliz *Plou-Penneat*

Sant Tenenan, he veleïen
Enn-ho lavare ho oferen,
A brezege hag a bede
Ha grasou Doue var-n-ho dënne.

Grasou Doue a zigas d'an den
Gwarez a-enep peb anken,
Gwarez eneb an Normanted
A zigaschont d'ar Vretoned.

Sant Tenenan a reaz ouspenn
Sevel er c'hre e Leskelen
Gant doufezhou doun tro-war-dro,
Da repui enn-han tud ar vro.

Eno voa c'hoaz en ti-bedi
D'ar zant ha d'ar re deue di
Epad brezel an Normanted,
Eno reat skol hag e varnet.

Hervez kelen sant Tenenan,
Ar bobl holl ha bras ha bihan,
A reaz pinijen, ha bedaz
Ha war-lerc'h ho zad a redaz.

Evit difenn he bobl kristen,
Tenenan hanvaz kabiten
Kermavan, en dijentil braz
Hag he armou a vennigaz.

He alia a reaz da zével
E-c'harz Plabennek en dourel
Da lakât veseliou an iliz
Pa zigwezie an Danmarkiz.

An dourel primm a voe savet,
Amzer a-vad n'en doa ket bet
D'ober an nor na d'he frenna,
Pa zailh an Danmarkiz war-n-ha.

An dijentil, den heb he bar,
A ra en nor gant er rod-karr,
Pad ma tiroll an Danmarkiz ;
Enn dro d'an dourel, d'an iliz.

Sant Tenenan e Leskelen
A bed Doue gant he veleïen
A eneb an dud kounnaret ;
He bedennou voe selaouet.

Nag enn dourel nag enn iliz
Ne c'hellaz mont an Danmarkiz ;
Ha pa glaskjont lakât an tan
E rankjont tec'het gant estlamm.

En arme vraz a zoudarded
A-zira-z-ho a voe gwelet,
Hag er marc'hek gwisket e gwenn
A-zioud an tour hag enn ho fenn.

He varc'h dindan-han c'houriche,
He gleze ruz steredenne,
Hag he vouez skiltr pa griaz,
An Danmarkiz a strafuillaz.

Ker braz e voe eno ho spont
Euz a vro Leon holl ma tec'hjont
Hep kredi gweach distrei ho fenn ;
Oc'h nerz Doue eo dinerz an den.

Aboe neuze bete vrema
Ne voent ket gwelet er vro-ma,
Evit diskouez eo'r pedennou
Krevoc'h evit an armeou.

D'ar c'houlz-ze an, Eskop a Leon,
Sant-Goulven a varvaz e Roazon,
Hag enn he lec'h e voe hanvet
Tenenan da ren he zenved.

Pa glev ar c'helou, Tenenan
A lavar : « re vraz eo ar zamm
Evit va diou-skoaz da zougenn,
Me zo pec'her, a veac'h kristen. »

Kaer e voe d'ezhan lavaret,
Ne c'hellaz chom hep kemeret
Ar garg Eskop a ginnige
An dud d'ezhan euz a-berz Doue,

Brema Eskop, sant Tenenan
A sell piz out-han he-unan
Hag en em gav an distera,
Hen koulskoude ar santela.

Beva treud, deread gwisket,
Iun ha pedi, neubeud kousket
A rea da veza war vale
Evit harpa he vugale.

Mont a rea dre he Eskopti
Da zeski an dud da bedi,
Ha da zevel an ilizou
Diskaret gant an diaoulou.

Da bep parrez roe beleïen,
Tud a feiz kre, gwir gristenien
A gare Doue hag ho nesa,
Evel ar re a zo brema.

Sant Tenenan, gwir bastor mad,
A iea dre 'r vro, evel en tad,
Da glask he zenved dianket,
Da greski feiz ar re n'oant ket.

Pa zave iliz Plabennek
Hag hen d'ar c'houlz-ze c'hoaz beleg.
E c'houlenne an aluzen
Da veva he labourerien.

« Enn hanv-Doue, en tamm aman
« Ha c'houi rofe, me Denenan,
« Da er c'hrek e kichen he zi ? »
« Me, tamm aman n'em beuz da rei !

« M'am beuz en tamm, me aotrefe
« E ve er mean war ar mare,
« Hag e ven sammet, o vervel,
« Gant an diaoul war he gernel ! »

War gaou anat goude feïza,
Pevar-bodad aman e doa,
Pa 'z eaz d'ho c'hask, ne gavaz ken,
Enn ho leac'h, nemet pevar men.

E Plabennek pell braz goude
Evit diskouez mad kastiz Doue,
Pisder ar c'hrek, feiz Tenenan
E voe dalc'het ar pevar mean.

Er burzud all e Plabennek
A c'hoarvezaz gant er beleg
Epad ma 'z ea da gas he Zoue
D'er c'hlaouvour keaz diwar ar ploue.

En er dremen dre en hent doun
An hosti gouezaz euz he zourn ;
Epad daou zervez her c'haskaz
Hep dont a-benn d'he gaout biskoaz.

Ar beleg keaz ia glac'haret
D'he Eskop d'anzao he bec'hed ;
Ar zant pa glev a bed Doue,
Hag he beden klevet a voe.

Epad ma 'z edo enn oferen
E wel o tiskenn er goulm wenn,
Kaer 'vel an deiz enn amc'houlon
Gant er bod derv, glaz he zeliou.

Ar goulmik out-han a dosteaz
Hag enn he gichen a lakeaz
Ar bodik glaz out-han gwenan,
Ho c'has'kuit a reaz Tenenan.

Dindan ar gwenan evel koar
E wel ker braz hag er vi iar
Er vout velen a zigoraz ;
An hosti sakr enn-hi gavaz.

Ar zant a drugareka Doue
Leiz he galoun, gwal'ch he ene
Lak' er c'hustod dirak and dud
An hosti kavet dre vuzud.

Sant Tenenan a vevaz c'hoaz
Evit gloar Doue' pad meur a vloaz,
Hag eüruz a welaz deut koz,
He bobl war hent ar Baradoz.

Er bloaz c'houec'h kant pemp ha tregont
D'ar c'houezek guere, hep meskont,
E varvaz en Eskopti Leon
Tenenan zo hor zant paëron.

Pa voa tremenet dre ar bed
He vuez bet mad hed-da-hed,
E lavaraz holl dud ar vro :
« Er zant enn hor c'hreiz zo maro. »

Neuze mouez ar bobl a Leon
Ha mouez an iliz wirion
A en em gavaz a-unan
Da bedi 'vel sant, Tenenan.

Enn iliz veur a gear Gastel
Voe sebeliet 'n Eskop santel,
Great he c'houel gant sant Houardon.
Enn he c'houde Eskop a Leon.

Iliz Plabennek e devoe
Darn relegou euz an den Doue ;
Eno ive voe great he c'houel
Er bloaz kenta, 'vel e Kastel.

Eno neuze e c'hoarvezaz
En dra a voe burzuduz braz,
Evit deski da bep-unan
Kredi e voa sant, Tenenan.

Deiz ar gouel-ze e Plabennek
A voe lidet, 'met gant en tiek
Ieaz d'he bark heb aoun e-bed
Evit devi douar marret.

A-greiz gwella ma labour
O c'hober faë war er zant Doue,
E luc'h an tan a-zioc'h he dal,
E kroz ar gurun o strakal.

Evel deliou gant ar barrad,
An den a gren ha penn ha troad,
Hag a dec'h kuit ha buan ha buan
Da glask pardoun sant Tenenan.

He galzennou douar marret
A iez e peziou mein kalet
Zo c'hoaz eno gwitib-unan,
Hervez buez sant Tenenan.

Gwell evit mein ha kalzennou
A chom war-lerc'h he vurzudou :
Feiz beo gouenn ar Vretoned koz
Gant Tenenan er Barados. G. MILIN.

Kantik sant Tenenan

Patron Parrez Plabennec

Tou kantik Sant Paol a Leon : *Canomp, canomp a greiz kalon.*

DISKAN :

Sant Tenenan, hor zant Patron,
Dalc'hit ar feiz enn hor c'halon,
Feiz birvidik hon tadou koz,
Ma'z aimp gantho d'ar baradoz. } *bis*

1

Ho tad, ho mamm, tud a feiz krenv,
A ziskueze d'ehoc'h hent ann env,
Enn ho maner, c'hoaz bihanik, { *bis*
C'hui oa devot 'vel eun elik.

2

Lakeat er skol gant Karantek,
Eur beleg santel ha gueziek,
C'hui a deuaz heb dale pell,
Da veza gueziek ha santel.

3

Da zeski gizioù tud al lez
E oac'h kaset da roue Londrez,
Hag er palez n'oa ket unan
Par d'ehoc'h, Aotrou Sant Tenenan.

4

Gant aoun da veza touellet
C'hui 'c'houlennaz koll ho kened,
Ha Doue, ker madelezuz,
A ro d'ehoc'h eur c'hlenved euzuz.

5

Eur galon hag ho karie re
A zistanaz diouz-tu neuze,
Hag euz al lez, laouen d'ho pro,
Da gaout ho tud c'hui a zistro.

6

Eno c'hui zesk da beb kristen
Gouzaon ar boan hag ann anken,

Meuli Doue koulz er c'hlenved
Evel pa vez var he iec'hed.

7

Mont a rit euz a berz Doue
Da gaout sant Karantek goude,
Ha goalc'het gant ho mestr santel
C'hui 'deuz flamm 'vel eur bugel.

8

A veac'h deut da veza pare
En em roit holl da Zoue ;
Evit trei kein a grenn d'ar bed
Da veleg ez ejot abred.

9

P'edoc'h guir vella enn ho pro
O prezeg ar feiz tro-var-dro
Doue ho tigas d'hor bro Breiz
El leac'h m'oa c'hoaz nebeut a feiz.

10

O tont euz ann Irland me vel
Ho pag, digor frank he gouël
Ha poulzet gant eun avel gre
Beteg traon Forest-Landerne.

11

C'hui oue digemeret laouen,
Vel eur Zant gant ar gristenien,
Digaset dezho gant Doue
Vit mad ho c'horf hag ho ene.

12

Setu diou iliz savet prest,
E Plabennek hag er Forest,
Hag eur chapelik c'hoaz ouzpenn,
Itron-Varia-Lez-Kelenn.

13

Biken mouëz ne lavaro
Ar vad ho peuz great enn hor bro,
Dre ho skuer vad, dre ho komzou
Ha niver braz ho purzudou.

14

Enn hor parrez oc'h bet Person
Ha; goude, Eskop e Leon,
Brema, enn env, tost da Jezuz,
Evel guechall oc'h gallouduz.

15

Pedit evit Plabennegiz
Pa zaoulint enn hoc'h iliz,

Ho diouallit diouz peb klenved
Ha dreist peb tra diouz peb pec'hed.

16

Ho pennoz deomp, Sant Tenenan,
Hor bennigit braz ha bihan,
Pedit Jezuz ma chomo don
Ar feiz kristen enn hor c'halon.

Evel-se bezet great.

G. V. YAOUANK, BELEG.

Kenta Pastor hor parrez

Sant Tenenan a voue hor c'henta Persoun, ha lakeat goude-ze da Eskop Leon, hag a varvaz e Kastel er bloaz 635. Choazet en doa Sant Per da veza Patron Plabennec, mes divezatoc'h e voue choazet ive Sant Tenenan he-unan.

Hon iliz koz a deuez da veza dirapar gant ann amzer. Mes ann A. Noël-Leon pa deuz aman da Bersoun, er bloaz 1723, a zavaz, a nevez, ann iliz a velomp breman.

Er bloaz 1755, da ziv, heur goude kreiz-deiz, e kouezaz ar gurun var ann tour hag her freuzaz beteg ar garidou. Ann ogrou nevez hag a ioa

koustet pemp mil lur, ha gwer ar prenecher a voue holl bruzunet. Ann A. Cornec persoun neuze, a boaniaz evit rapari ann droug great gant ar gurun, mes o veza m'oa nebeut a beadra ne c'hellaz ket bega ann tour, hag evelse eo chomet tounn abaoe. Varlerc'h ann A. Cornec e teuaz ann A. Braz ginidik euz a Sant-Divy, er bloaz 1765. Choueac'h vloaz goude, e teuaz ann A. Jestin ginidik euz ar Forest, er bloaz 1781; hor Persoun diveza araok ar Revolusion vraz.

Ar Revolusion

Ar franmasouned ne glaskent, pell a ioa, nemet diskar ar relijion gristen hag ann Iliz santel katholik, evelse pa gavjont ann tu da veza e penn ar c'houarnamant, e rejont lezennou difeiz ha diroll, var ho meno ar velein a rankje senti ouz al lezennou-ze, mad pe fall, evel ma vijent e vijent.

D'ar 27 a viz Du, e voue douget al lezenn miliget-ze.

D'ar mareou-ze, Plabennegiz a ziskuezaz muioc'h eget biskoaz peger beo va ar feiz enn ho c'halon ha pegement e kariant ho belein.

Setu perag lakepoted Brest, d'ar 26 a viz c'houe-

vrer, a deuaz, neket enn deiz, mes enn noz ha dre
guz, da gerc'hat ann A. Persoun evit he gas gantho
d'ar prisoun.

Kimiad ann A. Jestin

hor Persoun

Ton : Petra' zo' nevez e kear Is.

1

Plabennegiz'zo glac'haret
Gant ann traou trist'zo c'hoarvezet
Enn noz m'oa paket ho Persoun
Gant tud kruel ha direzoun.

2

Kriz ev kaloun neb a vije
Er presbital ma n'e vouelje,
O klevet ar c'hi, ar goelvan,
O velet bleizi var eun oan.

3

Va Doue, na pebez rann-galoun,
Guelet goalldreti eur Persoun,
'Balamour m'en deuz prezeget
Lezenn Jezuz evel m'oa dleet.

4

Gant eur vanden tud arrajet
Klubeu ann ifern dirollet,
Er kemeret abarz ann deiz,
Plaoufet ar Pastor gant ar bleiz.

5

Da ziv-heur goude anter-noz,
Pa'z edo ann holl o repoz,
E teujont da skei var an nor
'Berz ar Roue, c'houlén digor. »

6

Ar plac'h pa e deuz ho c'hlevet
Gant estlamm e deuz goulennet :
« Piou'zo aze d'ar poent-man 'noz
« Epad m'emaomp holl o repoz ? »

7

Unan euz a lubri Satan
En deuz respontet ker buhan :
« Ann Aotrou Jestin a glaskomp
« Parlant ganthan prest a rankomp. »

8

« Bez or beuz cun affer bresset,
« Da Gastel e rankomp monet ;

« Digorit prout, koust pe gousto,
« Ann Aotrou Jestin or bezo. »

9

Ar plac'h d'ann eac'h a zo savet
Enn eur vocla' deuz lavaret :
« Savit Aotrou deuit alesse,
Mar gellit savetei ho pue. »

10

« Aount ez euz deuet boure'hizien »
« Nemet gallek ne c'houzont ken »
« Kredi a ran a feiz parfet »
« N'int deut nemet d'ho kemeret. »

11

Cessit, Mac'harit, da voela,
Arruout a dlie Kement-mâ,
N'em boa repoz na deiz na noz,
Pell 'zo edon ouz ho gortoz.

12

Diskenn a reaz buhan d'an nor,
Hog hozaludoz gant henor,
Gant joa en deuz ho resevet
Evel he vrasa mignounet.

13

« Deut tudchenteil, antreit er zal
« Ma pregnign ann nor-mâ raktal,
« Rag aoun e meuz e guirionez
« Na deuffac'h da goll ho puez. »

14

« Ma c'houffe sur tud va farrez
« E venn paket enn ho touez,
« Me hoc'h assur ha kredit mad,
« Souden e velfac'h eur gombat. »

15

N'Aotrou Persoun 'n'euz lavaret
D'he c'hoar Mari pa'z int antrect :
« Cessit va c'hoar baour da voela,
« Souffr a ranker enn amzer mâ. »

16

Digasit amâ peadra
D'ann dudchenteil-mô da eva,
Peadra ivez da zribi
Poent-braz eo dezho dijuni.

17

Ann dudchenteil 'deuzrespontet
N'on deuz affer netra ebed

Na da zribi na da eva,
Aotrou poent eo deomp partia.

18

He c'hoar Mari en eur Voela
O velet e rank partia,
Var he daoulin en em strinkaz,
Da c'houlén digantho-he c'hras :

19

« Va breuv n'en deuz great droug ebed
« Da vea d'ar poent-man Kemeret,
« Vel eul laër pe eun torfetour
« Chui deu da dreti va breur paour. »

20

En eur vont dreist treujou ann ty
Elavaraz d'he c'hoar Mari ;
« Tavit va c'hoar na voelit ket,
« Me deui heb dale d'ho kueleit. »

21

« Diouzoc'h tout e Kimiadan,
« Marteze ar vech divezhan.
« Pedit Doue da va zouten
« Ma tifennin ar guir lezen. »

22

« Va gourc'hémennou d'am mam geaz,
« Sur e vezo glac'haret braz,
« It d'he guelet da Zant-Divy
« Pedit Doue d'he c'honzoli. »

23

Heb kaout amz'er d'en em viska,
Ratk-tal e rankaz partia,
'N'he zoudanen e oue krapet,
Kerkent var ann hent braz kaset.

24

Eno edont ouz he c'hortoz
Ann dud barbar gant ho c'harros,
Hag ennhï e voe plantet bahan,
Hag a'chano evel ann tan.

25

P'edont ovont dre ann hent braz,
Dioc'h ar Groaz Sakr e Kimiadaz :
« Adie, d'eoc'h Kroag ar mission,
« D'an eneoù keiz roit pardon ! »

26

« Va Jezuz n'hon dilezit ket
« Ne ha va fobl mina kar et

« Roit deomp bepred hoc'h asistans
« Hag hon hénchit enn assurans.

27

« Adie, pobl keiz a Blabennec,
« Ne a meuz d'eoc'hui prezeget,
« Dal'chit sonj mad euz euz ar c'homzou
« O peuz klevet dre va ginou.

28

« Adie, d'eoc'h tadou ha mamou
« Adie, d'eoc'h holl bugaligou,
« C'hui breman' zo abandon et
« Etre daouarn schismatiket ! »

29

« Me c'houlén a greiz va c'halon
« Ma chomot stard er Feiz guirion
« Ma tal c'hot da garet Doue
« Ha da ober he volonte. » Amen.

Glac'har Plabennec

1

Pebez glac'har Plabennegiz
O velet goullou ann iliz,
Pa na velomp mui hor Persoun
A Gariemp a greiz hor c'haloun

2

Edomp o ren ar pemped bloaz
U'or boue digant Doue ar chraz
Da gaout tenzor ar mission
Digoret deomp gan hor Person.

3

Pebez glac'har ha rann-galoun
O c'houzout ema hor Persoun
'Bars e Castel Brest diouallet
'Baoue seiz miz gant kanfarted.

4

Mall braz or beuz sur da velet
Hor Pastor ker mad, ker karet !
A zoufr abalamour deomp-ni
O velet hor persecuti.

D'ar mare-ze, ann Aotrou Kerangeven a iva kuzet el Leuan. Ann tri Aotrou, Quenea, Abernot ha Colin a iva ive kuzet er barrez.

Ann deiz kenta a viz Maë 1791, e oue digaset triugent soudard euz a Vrest da Blabennec da essa lakat eur persoun INTRU e plass ann Aotrou Jestin, mes n'oa ket bet dare dezho. Potred Plabennec ne felle ket dezho assanti ; ha setu potred Brest red mad dezho en em denna kuit. Ues dont a rejoint adarre 17 devez goude, hag e teuaz gantho *kant* martolod, *daou c'hant* gard NATIONAL, anter kant kanonier daou bez kanol gantho. Pa errujont e *Boudoulevry*, e veljont va torret ar pont evit mir et outho da basseal. Neuze e laoskjont eun eun tenn kanol bennaz evit ober aoun da Blabennigiz. Hag o vele e vije poan gollet steki eur pod pri ouz eur pod ouarn, ann dud divar ar meaz a ieaz kuit euz ar bourk.

Er blavez-ze, d'ar ba viz eost oa bet ordrenet diskar ar c'hleier euz ann touriou evit beza kaset d'ann teuz. Mes conseil Plabennec a c'houlennaz derc'hel ho re evit gervel ann dud d'ar c'honseil a veze ranket da asambli teir ha perder guech ar zizum avechou.

Emiz Gouere 1792, potred ar Republik a bro-mettas, ugent skoed d'ann nep a bakje eur belek bennag dindanu guz.

Persouned ar barrez-meâ, goud ar Revolution

Ar c'henta, ann A. Mocaër, er bloaz 1801. Ann A. Cazul, e 1917. Ar Gureed o deveze pep hini he gambr er bourg pe var dro, mes abaoe e vezont ato er presbital gant ho persoun. Ann A. Saillour a deuaz er bloaz 1823, enn c'houde ann A. Loutr euz Sant-Thégonnec, hag en doa sonj da rapari c'hapel Lezkelen m'en devij gellet prena ar plas digant potred Brest. Ann A. Bars' ginidik euz a Blouider a deuaz er bloaz 1829. Pevar bloaz goude e kouezaz ar gurum var dour Lok-Maria, er bloaz 1833. Er memes deiz ha d'ar memes heur, e kouezaz ive var dour Penkran :

Kerkent luc'hed ha kurunou
A deu da sklasi ar c'halonou :
Tour Lok-Maria a voe faoutet,
He c'haridou d'ann douar strinket :
Var hed eul leo deuz Landerne,
E Penkran e deuz great ive
Kalz a zroug ha destruction
Hag a spont, a rann ar galon.

Cf Alb. le G. p. 505-9 et Kerdanet.

Goude m'oa rapaet ann droug, e veze great adarre ar pardon evel kent. Ann kent-braz a oue great ive d'ar mare-ze. Bet neuze oa diez braz darempred ar chapel, dreist holl dre vaoz Kerc'halz ann tiegez.

Ann A. Bars a raparaz tour ha chapel *Loc-Maria, infirm*, ha pell dioc'h ann iliz, e savaz eur presbital nevez kalz tostoc'h eget presbital *Landouardon*. Ar baresioniz avis a gementse a lavare goude-ze :

Bezomp laouen, Plabennegiz,
Tost ar presbital d'ann iliz.
Ni breman, gant eur c'halvaden,
A gavo prest hor beleien.

*
* *

Presbital koz Landouardon,
Ni zalc'ho sonj, en hor c'halon
Omp bet ennod ken aliez
Digemeret gant karantez.

C'houeac'h vloaz goude-ze, er bloaz 1853, e varvaz ann A. Bars, hag enterret e Plouider. En eur ober ar presbital en doa ive kresket ar vered, e koztez ar jardin ezoa eun nebeut tiez bian hanvet bodonn santel oveza m'edont demdost d'ann iliz,

hag a oue freuzet evit kreski ar vered, ha mad a ioa great. Ann A. Queinnec ginidik euz a Sizun, a deuaz neuze da Bersoun aman, er bloaz 1853.

Ian Kerhuel, Greffier, mestr-skol, hag ive mestrkaner en iliz, oveza skuiz gant he labourou, a roaz he zilez er bloaze hag a varvaz e 1856 d'ann oad a 45 ar vestrez-skol, Jeannett Guillou, a reaz ar memes tra er bloaz 1859.

Er barrez-man, ar greffier hay ar c'henta Mestr-Scol goude ar revolution, a Voe Tanguy ar Yaouank euz a Landouardon, goude-ze e voue Kadic hanvet ar C'hadic Koat-an-abat, daou Ian Gueguen euz ar bourg, hag er fin Ian Kerhuel. Araok Jeannett, Juliana ar Penker oa skolaërez ar merc'hed.

Ann A. Persoun Queinnec a gemeraz freret ha Seurez et evit ann diou skol.

Er bloaz 1872, ec'h astennaz ann iliz. E 1880, ec'h hueleaz ar presbital. Er bloaz 1882, o veza m'oa koz ha kaba'ch, eroaz ann dilez euz he garg, hag ez eaz da repoaz da Gernilis gant ann A Gauthier bet amâ kure gantham. Er fin, er bloaz varlerc'h e varvaz eno, oajet o 77 bloaz, hag e ove enterret e Plabennec, e bez vreur bet 27 vloaz, kure gantham.

Varlerc'h ann A. Queinnec, bet hor Persoun epad 29 bloaz, e teuaz ann A. Billon, guindik euz a Vipavaz, hag a varvaz aman e fin mis Maë 1917, d'un

oad a 80 vloaz. Ar skoliou kristen on euz breman, a oue savet ganthan.

D'an 21 Even, e teuaz aman da Bersoun, ann A. Boderiou ginidik a Blougourvez, hag a ioa Persoun er faou.

D'ar mareou m'oa bet *laïciset* ar skoliou, oa eat euz a Blabennec, vardro 28 plac'h iaouank da *Seurez*et ha 9 den iaouank da *freret*. Ar c'hosa oa *Job ann Amour euz Kerveguen*, hag enn eil, *Ian Monod euz a Lanveur*, maro e ti ar re goz e Kemper, er bloaz 1916. d'ann oad a 83 bloaz. Araok beza *frer*, oa lezhanvet ann ermit, abalamour m'oa eun den euz ar re zevota.

Chabelou

Enn eur penn euz ar barrez e ma chapel Loc-Maria hag a gendalc'h ato da vez darempredet gant eun niver braz a dud edoug ar bloaz, dreist holl, da voueliou ar Verc'hez.

Enn eur penn all edo chapel Lezkelen, bet savet gant sant Tenenan, enn henor d'ann Itron-Varia, hag a veze darempredet kaër ive guechall, araog ar revolution. Mes ar revolutionerien her guerzaz da eul lastez Aotrou euz a Vrest, hag her freuzaz

evit kaout mein da zevel eun *hôtel* e ru Siam e Brest.

Ar c'harteriz, gant aoun na'z aje ive ar Verc'hez gantho da Vrest, he c'hasaz dre guz da iliz Kersent, el leac'h m'he gueler c'hoaz hirio, en esper he digas enn dro pa vije gellet rapari ar chapel. Ann Abostol Sant Iann a ioa en he c'hechen e Lezkelen a voue digas et asamblez ganthi da Gersent. Jesus pa edo var he dremenvar, a choazaz ar Zantze a garie dreist ar re-all, evit servichout da vab d'ezhi enn he leac'h keit ha chomje c'hoaz var ann deuar.

D'ar mareou ma teuaz ann A. Queinnac da Bersoun, ann ilis a c'hellaz prena plas ar chapel digant mestrez Lezkelen. Mes ann iliz a ioa da greski, ha kalz traou all da ober, setu ar paourkeaz chapel chomet da zevel. Ann tour a ioa demdost henvel ouz tour Sant-Divy, hag a gouezaz, en bloaz 1884. Kraaz kaër ar vered enn he gichen a guezaz, hag a dorraz, pemp bloaz goude ann tour, e 1889.

Guechall oa eun dudi gvelet chapel Lezkelen, e kreiz eur bodat guez huet hag a ioa evel lakeat eno gant Doue da c'houkori ha da zizheolia ty he Vam-Zakr. Eun dudi oa ive guelet, epod ann anv, da zul ha c'houel goude ar gouzperou zoken, pegement

a dud a iea da velet ar Verc'hez-Vari, gant ho japedenn ho dourn, hag ho bugaligon var ho breac'h.

Siouaz ! breman, er c'hontrol e chomer mantret gant gloc'har, o velet baliou ar Zaal hag henchou Lezkelen evel e kaonv, o veza n'int mui darempreded evel guechall.

Er bloaz 1885, eur beleg koz, ovelet oa freuzet ar chapel ha kaset ar Verc'hez kuit a reaz ar c'han-tik glac'haruz-man :

Ton : *Me a laka va fizians Guerc'hez-enn ho sikour,*
pe Ton : *Va c'haloun a zo fraillet.*

1

P'oue ann Israëlitid,
Dre'r brezelioù guechall,
Kemeret ha chadennet,
Kaset enn eur vro all.
Ar plas Krenv euz a Sion
A Voue holl ravajet,
Ha templ santel Salomon
Penn-da-benn dismantret.

2

Pa velaz Jeremias
Ar ravaj spountuz-ze,
N'eur tenva fors e kriad :

« Va Doue, va Doue !
« Ho templ a zo diskaret,
« Freuzet hoc'h Aoterioù,
« Ho tabernacl bruzunet,
« Stlejet dre ar ruioù ! »

3


Pa zellann ouz Lezkelen
E velan e va bro
E doare eur skeuden
D'ann distruj great eno,
Ar Verc'hez'zo dilojet
Enn despet d'he guirioù !

4

Peleac'h eat ann amzerioù,
A feiz, a zantelezh ?
Ma teue guechall hon tudou
Da rei da rei gant largentez
Arc'hant, aour, ha leve
Hag ho dillad zoken
Da zevel da Vam Doue
Chapel kaër Lezkelen ?

5

TOUR LEZ-KELEN
Kouezet enn he boull
ar 6 a. viz c'houevrer 1884. Peleac'h eat ann noblansou,
Ar vadoberourien
A rea ker kaër offransou



Da Verc'hez Lezkelen ?
Hag or pennou tiegez
Ann dud-ze askiant
Guechall souten ar barrez
He gloar he ornamant ?

6

Pelec'ech' ma'r gragez brudet
Dre ho devotion,
A roe goalen ho eured
Euz a greiz ho c'halon
Diouz ho fenn ann dantelez
Hag ho c'hroaziou ouzpenn
D'orni aoter ar Verc'hez
E chapel Lezkelen.

7

Tud a galoun zo bremâ
Koulz a m'z oa guechall,
Perak n'e ve ket eta
Savet eur chapel all ?
Itron-Varia Lezkelen
Lojet gant Keriz-Sent
Di a ziztrofe laouen
D'hor zikour evel kent.

8

Pebez joa evidomp-ni,
Neuze Guerc'hez santel
Da c'hellout mont d'ho pedi
Adarre d'ho chapel
Sant Tenenan hor Patron,
Ha C'hui hor Patronez,
Ni ho kar a greiz kalon,
O pet ouzomp truez !

Var dro tregont pas dioc'h chapel Loc-Maria,
euz bet guechall menec'h peleanet. Ar gouent pe
hozi a veze hanvet Lean-di, da lavaret eo ti-leanet,
hag evit lavaret berroc'h Lann. Setu perag ar
c'harter-ze 'zo hanvet ato, all Lann.

O veza m'oant devot dar Verc'hez, o doa savet
eur chapelik et leac'h m'ema ar chapel braz savet
divezatoc'h, Ker bihan oa, ma reat *locus* Mariæ
anezhan, mes ar Vretoned a lavare *Loc Maria*, hag
abaoe e roer dezhan ann hano Kaër-ze. Eevelse
eur c'hester, er chapel-ze, a dle lavaret evel ma
ra ato : Evit *Intron-Varia* al Lann, nep en deuz
devosion. Eguirionez ar Verc'hez, lakeat eno gant
ar venc'h, a iva d'ho c'houent setu perag oa *Intron-Varia* al Lann.

E chapel Loc-Maria
Intron-Varia al Lann
Morse ne refuz netra
Da bobl sant Tenenan ;
« Presantit d'ho Mab Jezuz,
« Peden ho pugale,
« James ne c'hell ho refuz,
« Sur omp a gement-se. »


Sant Joseph he fried a voue lakeat asamblez
ganthi er chapel-ze ive, ha n'en deuze ket Kaëroc'h
patrom el leach all.

Chapel al Lann pe Loc-Maria

Ton : Gastibezza (V. HUGO) C. F. Le Pèlerin de 1888

1

Plabennegiz, diredet omp d'ar chapel
Holl asamblez,
Amâ, dirag ar Verc'hez fidel,
Kanomp' n'eur Vouez.



LOC-MARIA

Prosesionou

Amzer'z bet, prosesion sant Tenenan, deiz ar pardon, a ziblase euz ar bourk da zeiz heur, a iea dre ar Groasprenn, hag ar feuntten-venn, da Lezkelen, a zistroe dre Lanorven, evit erruout er bourk abenn ann oferen-bred. Er bloaz 1823, oa bet, ar vech diveza, ar prosesion e Lezkelen deiz gouel ar Rozera, evit ar Gousperou, rak, ar chapel a ioa freuzet hag ar vein kaset lod anezho da Vrest, hag cul loden all d'ar Visac, e Guipavas. Ar Verc'hez a ioa ive neuze Kerzent. Ann tour hag ar groaz-kaër a iou c'hoaz enn ho zav.

Amzer'zo betive, prosesion ar Zakramant, ar zul kenta goude ann oferen-bred, a iea da chapel Lanorven. Er Roudoulevri, var bord ann hent braz, e peun hent ar Ruguel, e veze great eur *reposouer* kaër evit ar Zakramant.

Mes er bloaz 1863, hor Aotrou'n Eskop, a zifen-naz ouz prosesionou ar Zakramant enn he Eskopti mont ouz penn eur c'hart eur bale dioc'h ann iliz, evit ma vije nebeutoc'h a zizurz ha brasoc'h devo-sion. Ann eil sul, goude gousperou, ar Prosesion-ze a ivea da Groaz-ar-Mission. Eneb leach, ne vije kavet eur plas ker kaër da ober eur *reposouer*.

Bep sul kenta ar miz, goude gouzperou, ez ea ive prosesion ar Verc'hez di pa veze mad ann am-zer, hag ann holl daoulinet dirag kroaz ar mission a gane a greiz kaloun ar c'hantik koz ha kaër : *Etal ho kroaz leun a anken, goude va follentesiou, etc.*

Kroasiou

Ann Aotrou *Rolland de Neufville*, Eskop Leon, maro er bloaz 1613, d'ann oad a 83 bloaz, evit digas sonj d'ann dud eo maro Jezuz-Krist var ar groaz evit ho zavetei, a lakeaz sevel *pemp mil* groaz var bord ann henchou, pe er chroaz-henchou, enn Eskopti-man, d'ar mareou m'edo pelerinachou ar folgoat o tigeri. Hor parrez-ni, evit dourè, e devoue he lod, rak, goude ar c'hroasiou bet torret epad ar revolution, e velomp c'hoaz var dro peder groaz var'nn'ugent enn ho zav dre ar barrez. Ann diou gaëra oa kroaz Lezkelen hag hini Loc-Maria. Kroaz ar vosen etre Loc'higou ha Kerever a ioa bet savet eno er bloaz 1546, hag a zo bet raparet gant Iann ar Brun euz Kerever er bloaz 1911. Kroaz ar Skaven a ioa savet gant ann A. Plougastel e 1732 ; hag Groaz prenn, gant Mari Abivin euz al Leuan, er bloaz 1833.

Ar beorien geiz, oc'h ober tro ar barrez, a jome
a za avechou dirag ar c'hroasiou ha da gana :

Grit deomp anaout priz hon ene,
Talvout a ra goad eunn Doue.
O va ene peur e sonji
E poaniou Jezuz ha Mari.

Var moger ar vered, dirak ty *Keriel-Kerhuel*, euz
bet eur C'halvar, evit beza n'oa ket goall vraz, hag
a iya evelato unan cuz ar re gaëra. Eno e velet
Jezuz stag euz he groaz, e kreiz etre daou laër. Ar
Verc'hez, sant Ian, Mari Madalen ha Salome a ioa
e kichen. Patromou daou vanac'h a zo lar koc'h
hag izeloc'h emâ patrom ti bian Nazareth douget
da Loretta gant ann elez. Ar mirakl-ze'zo skrivet
gant ann A. Morvan e Buez ar Zent, ann 10 a viz
Kerzu. Tri mas ar c'hroasiou a zo c'hoaz var voger,
hag e kreiz e chom, enn he zav, ar rest euz kroaz
ar mission savet eno er bloaz 1857.

Da zantez Anna

Ton : Meulomp holl da james.

DISKAN

Kanomp holl gant joa,
Meuleudi Santez Anna (*bis*).

1

Piou a c'helfe ho meuli,
Santez Anna euruz ?
C'hui eo Mam goz Jezuz,
Ha Mam ar Verc'hez Vari.

2

O, kearik vian a Zephor,
Ennoc'h-hu eo ganet
Mam goz Salver ar bed,
Plebez gloar, plebez henor !

3

Hano tad Santez Anna
A ioa Stollanus ;
Hano he mam euruz
Oa Emerentiana.

4

Da Emerentiana
Eun eal a lavaras
E devije ar c'hras
Da c'henel Santez Anna.

5

Sant Joachim oa 'r pried
Gant Doue choazet dezhi ;
He c'hoar oa Ismerii,
Mam Santez Elisabeth.

6

Mam Goz, bezit truezuz
Ouz ho fillorezet,
Ha d'ann intanvezet
Dousait ho buez ankeniuz.

7

Bezit skoazell ar mamou,
Evit ho bugale,
Er gear pe enn arme,
E kreiz ann holl danjerou.

8

Dreist ar Zent hag ann eled,
E kichen Mam Jezuz,

9

Var eun trôn lugernuz,
C'hui a zo breman savet.

10

Santez vraz, evidon-me,
Eur c'hras a c'houlennan :
Deuit, em heur divezan,
Da zigemer va ene.

11

O Mam Goz/karantezuz,
Grit ma teui ho pugel
Eveldoc'h da vervel
E gras hor Zalver Jezuz.

12

Anna, Mari ha Jezuz
Bezit ganeen hepred,
Ra varvin n'eur laret
Hoc'h hanoiou dudiuz !

Amen.

Va zarmoun genta

(evit gouël ar Rozera, 1879)

(*In nomine Patri et Filii et Spiritus-Sancti. Amen*)

KRISTENIEN

Evel ma reomp hirio gouël Itroun-Varia ar Rozera, e teuan da lavaret d'ehoc'h eur ger ben-nag divar benn ar Verc'hez Gloriuz-Vari evit pechini o peuz eun devotion ker braz, eur garantez ken tener.

Rak-se, en eur sevel e kador ar virionez evit ar vech kenta, en em gavan aïruz meurbeg dazont da hompze e'ehoc'h divar benn ann hini a zo galvet gant ann iliz, gloar Jerusalem, Joa Israël, honor hor bro : Tu gloria Jerusalem, lætitia Israël, tu honorificentia populi nostri. Eüruz oun da hellout, evelse, lakas ann deveriou pe al lobouriou kenta euz va c'harga veleg, dindan protection gallouduz Rouanez ar velrein.

N'e deuan ket, a dra-zur, da zeski d'ehoc'h kare ha servicha ar Verc'hez, rak, en eur vro evel hor bro, hag ispisial en eur barrez evel hon hini el leac'h m'eo c'hoaz ker deo ar Feiz er c'halonou,

piou a helfe lavaret n'ouzoe'h nag he enori nag he fedi.

A drugare Doue, ann holl er barrez-man, adaleg ar bugel var barlon he vamm, beteg ann den koz var bord he vez, ann holl a c'koar enori ha pedi hor Mamm pehini' zo enn env, ha lavaret dezhi ar bedennik-ze, ker kaër, ken eaz zeski : (*Ave Maria*) Me ho salud Mari. Piou ar bugel ha ne voar ket, e Kreiz he boan hag he anken, sevel hag astenn he zivrec'h etr zek he vamm, ha lavaret dezhi : va mamm, va mamm, deuit d'am zikour !

Ann devotion d'ar Verc'hez a zo, evel pa lavarfen, eun heritaj roet deomp gant hon tud koz. Bemdez e velomp, dirag hon daoulagad, testeni a gement-se. Peb parrez e deuz eur chapel, pé da viana pep iliz e deuz eun aoter en enor da Vam Doue.

Ar barrez-man, a zo evel pa lavarfen, diouallet gant Itroun-Varia al Lann dioc'h eur c'hostez, ha dioc'h eur c'hostez-all gant Itroun-Varia Lezken, petra bennag n'emu mui ar chapel enn zav. Dioc'h eun tu, Itroun-Varia ar Rozera en iliz-man, hag Itroun-Varia Lonrd diod'h eun tu-all.

Ar plac'hig Bernadett var he daoulin hag he chapelenn he dourn bevech ma vele ar Verc'hez, a ziskouez deomp pegement e plije ar Rozera d'ar Vamm-ze a drugarez.

Enn amzer goz, brasa henor a c'houiet da ober da eur Prins, pe da enn den a renk huel bennag. oa kinnig d'ezhan eur gurunen great gant roz. An gristenien ho-unan, evit enori ar Verc'hez pe ar Zent, o doa kustum da lakât dezho bokedou ha kurunennou roz var ho aoteriou. Setu a beleac'h e teu ann hano Rozera, hag a sinifi kurunen roz.

Sant Dominik inspiret gant ar Verc'hez he-unan, en deuz instituet ar Rozera, ha desket deomp he lavaret evel m'her greomp breman. Ann tri chapel led a zo er Rozera, a leverer evit enori ar pempek mister euz a vuez, Passion, ha maro hor Zalver Jezuz-Krist hag he Vamm zantel. Ar *Gredo*, a leverer en eur goumans, eo ann abrije euz ar pezh a rankomp da gredi evit beza salvet.

Ar *Bater* : *Hon Tad pehini* 'zo enn env, e penn peb dizenez, ha bet desket deomp gant Hor Zalver he-unan.

Goude ar *Bater* n'euz peden ebet ker kaër hag ann *Ave Maria* : *Me ho srlud, Mart*.

Mari eo Rouanez ann Env, Mamm hor Zalver Jezuz, dreizhi e fell da Zoue rei deomp he c'hrasou.

Pa edo ar roue Salomon guechall, var he drôn er palez. Bethsabée he vamm a deuaz d'he gaout da c'houlén eur c'hras evit unan euz he suJedi.

Salomon, pa velaz he vamm o tont, a savaz, d'eoc'h-tu, divar he dron evit he zaludi. Hag he lakeaz da azeza enn tu deou dezhan. Ha neuze e lavarraz : Va mab, emezhi, me ho ped da rei dinn va gouleu, evit n'am bezot ket ar vez da veza refuset ganeoc'h. O vamm, eme Salomon : goulennit ar pezh a gerot, n'emeuz netra da refus d'ehoc'h.

Setu aze ive ar pezh a c'hell hor Zalver da lavaret d'ann hini a zo bet ken enoret ganthan var ann douar, hag a zo da dosta dezhan e gloar enn env, er baradoz. Divar he groaz, araok, mervel, Jezuz a roaz ar Verc'hez deomp evit mamm : *Mulier, ecce filius tuus* ; ha ni evit Ne bugale : *Ecce Mater tua*, emezhan du Zant Iann : *Setu aze ho Mamm*. Rak-se'ta, pa'zeo ar Verc'hez hor Mamm, dizkouezomp d'ez hi ez omp he bugale, en eur boania da heulia he vertuziou.

Pedomp anezhi gant devosion ha gant fizians. Hi eo ar Vamm leun a c'hras hag a drugarez, consolation ann dud pouniet hag offlijet, pareans ar re glanv, hor joa hag hon esperans.

Pelerinet Itroum-Varia Lourd, ama ouz vazilaou, livirit d'inn petra o peuz santet enn ho kalon, pa edoc'h dirak ar *grott* santel a ziskennaz ennhi ar Verc'hez evit astenn he doauarn leun a c'hrasou evit he bugale. Guelet o peuz eno kalz traou kaer

ha burzuduz. Hag evel ann Ebestel guechall, var menez Thabor, o peuz lavaret : Bonum est nos hic esse. O ! peger mad eo beza aman ! Aman ti ann Aotrou Doue ; ha porz ar baradoz. Seblantout a rea d'ehoc'h guelet ive ar Verc'hez deueta da barea ann dud klanv, pazeant d'arfeunten burzuduz *Viderunt eam Filiae Sion, beatissimam præ dicaverunt, et reginæ laudaverunt eam etc...*

« Meulomp hor Mamm Zantel »
 « Dreist ann oabl skeduz »,
 « Hor c'halonou fidel »
 « A bigno jaoüs »
 « Epalez kaër Jezuz »,
 « Bodet disoursi »,
 « Eun deiz ni vo eüruz »
 « Enn dro da Vari. »

(Evelse bezet great).

Santez Barba

Ton : Ni ho salud Rouanez ann Elez.

Santez Barba, guerc'hez ha merzerez,
 Dirak Doue, c'hui hon alvokadez,
 Hon diouallit eneb arc'hurunou,

Grit ma varvimp gant ar zakramanchou.
 Tad ar Zantez p'en doa he dibennet,
 Gant ar gurun raktal oue pulluc'het,
 Hag abaoe, diouz tan ha Kurunou.
 Barba hor mir, dre nerz he fedennou.

Relegeier

Ar relegou ne dleont morse beza douget e prosesion ar Zakramant, abalamour ne dleer enna, enori nemet nemet hov Zalver Jezuz-Krist he-unan.

Mes e prosesion eur pardon e vezont ato douget hant kalz respet ha devosion. Kalz relegon a zo en diou voesten a vez douget aman.

1° Er voesten vian *arc'hantet-alaouret*, eman relegon sant *Ian-Vadezour*, sant *Barthelemi*, sant *Lorans*, ha sant *Visant*.

2° Er voesten vraz, koat Kristin, great evel eur chapel, er bloaz 1856, e Kemper ; eman Relegou santez *Raparea*, ha daou-ugent relegou all, merzerien, pe merzerezet. Kalz devosion a zo ive er barrez-man, da Zantez Barba, da zantez Mac'harit, da sant Sebastien ha sant Rok, amzer zo bet, ann daou Zant-ze o doa patromou bihan, e Koat, hag a veze douget, var beg eur vaz, gant bugale pa veze prosesion e Lezkelen.

Santez Raparea

GUERC'HEZ HA MERZEREZ

Hag a zo lod euz he Relegou enn Niz Plabennec

Ton : *O va Jezuz va viot meulet.*

C'Hui Kristenien, hag a gar beza
Skoliet var ho silvidigez,
E gloar da ZANTES RAPAREA
Selaouit histor he buez.
Deski a rai deoc'h, o c'heul he skuer,
Servicha Doue fidelamant,
Rag kent eget mankout d'he C'hrouer,
E c'houzanvan peb seurt tourmant.

E Cesaree, euz ar Palestin,
Oue ganet, eme ann histor,
Hag eno e renaz eur vuez din
A beb meuleudi hag henor.
Enn he buez e devoue, e partach,
Noblans ha talanchou aleiz,
Mes ar pezh a dalie davantach,
Eo ma oue kelennet er Feiz.

Abred e oue dezhi espliket
Gant he zud al lezenn gristen,

Aag eto e devez bet heuliet
Lezennou Jezuz, Doue ha den.
Ato e oue ha fur ha prudent,
Ato devot, pur ha santel,
Humbl ha modest, sobr ha pasiant
Hag e peb tra da Zoue fidel.

Eunn Impalaer (Deç eo her galvet),
A c'houarne neuze ar vro ;
Kement kristen dezhan a gavet,
Holl ho c'hondaone d'ar maro.
Ann den kruel, paian ha barbar
Ne espern na hoz na iaouank,
Na nobl, na partabl, na kar, na par,
Mar d'eo kristen, dezhan n'e vank.

RAPAREA, c'hoaz enn oad tener,
A renkaz stourm evit ar Feiz ;
Mes heb mankout taol enn he dever
E chomaz fidel noz ha deiz.
P'oue interrojet hon dimezell
Divarbenn he relijion.
Pas eur moment hebken n'e vransell
O tifenn kaos ann Doue guirion.

Diskleria' ra dirag ann tirant
N'ez euz ken Dpue nemet unan :
Prest eo da c'houzaen peb seurt tourmant

Kentoc'h eget renons dezhan.
Eunn Done, emezhi, a adoran
Ha neket ho toucou faoz ;
Eunn Doue a gredan hag a garan,
Biken james n'en jenchin kaoz.

Ann tirant, o fellout he desseo
A ra dezhi promessaou kaer :
Mes ouz ann holl draou-ze n'e gleo ;
N'e glask nemet gloar he Zalver.
Ar paian pa vel ann dimezell
Oc'h ober fae var he gomzou,
Ker buan a jench mouez ha maniel,
Hag en em daol d'ar gourdrouzou.

Me vel emezhan, eo inutil
Parlant ouzit dre vadelez :
Mes me rai did santout d'ann eil
' C'houzoun tourmanti heb truez.
Brema-zouden emeur var da dro,
En em brepar d'ar sakrifis :
Ne deuz na tan, na ploum, na bero,
Na'z pezo-hi e meur a c'hiz.

N'em euz aoun, eme RAPAREA,
Aoun ebet rag ho kourdrouzou ;
Gouzaon a rinn, heb klemm na guela,

A beb seurt poan ha tourmanchou.
Evit va Jezuz e c'houzanvin,
Evidon en deuz gouzanvet,
Souden er c'hloar ganthan e vezin,
Biskoaz n'em euz ken deziret.

Var ar ger ann tirant a ordren
Ma vezo divisket enn noaz ;
Skuilla ploum teuzet var he c'hroc'hen
Heb damant, ken a vezo poaz.
Mes ar ploum teuz ne nouz mui dezhi
Eget n'e raffe hini ien :
Ma renk ar bourreo klask evithi
Tourmanchou all, pa n'e c'hell ken.

Guinegr bero buan a zigasser
Da rei dezhi enn he ginou
Ha flambochou braz a alumer
Evit grilla he c'hostesiou.
Var gement-se' c'houlenner outhi
Hag gi a renons d'he Jezuz :
Salokraz, ne ran ket, emezhi,
Ha biskoaz n'e ouen ken euruz.

Var eur c'hrill houarn hen astenner,
Lakeat var eur c'hlaouiaden veo,
Enn hevelep fessoun m'he renter

Enn eur stuz nemet rost n'e deo.
 Er stad-ze ar barner a ordren
 Ma vezo great ganthi tro kear,
 Evit trubuilla ar gristenien
 Dre'r stuz ma'z eo lakeat ho c'hoar.

Ar zantez dre'r ruiou o tremen,
 N'e barlant nemet a Jezuz,
 Oc'h alia ann holl gristenien
 Da c'houzaou' vit beza euruz.
 N'euz na kaoter na fourniez a dan,
 Na kribou dir, na fourniez a dan,
 N'ho implijer dre urz ann tirant
 Evit ober dezhi trei kein.

Goude-ze c'houlennaz outhi,
 Hag hi a renonso d'he feiz :
 Biken james n'her grinn, emezhi,
 Hag em zourmantfac'h noz ha diez.
 Erfin, ann den kruel o velet
 Eo inutil ann tourmanchou,
 A ordren ma vezo dibennet
 E meaz a gear var ann henchou:

Evel ma kuez he fenn d'an douar,
 E veler furm eur goulmik venn
 O sevel euz he c'horf enn ear,

Ha d'ann env o nijal a benn.
 Brema tirant ha koutant oud-te,
 Ha soublet' vezo da arrach ?
 Chomet oud feaz ha kent ha goude,
 Heb ann disterra avantach.

Kenta ma c'hellaz ann dud fidel
 Kaout he c'horf vit beza beziet.
 Hen lakejont enn eur plas santel
 Gant devosion ha respet.
 Da batrounez e oue kemeret
 Er gear a Niss euz ar Provans
 Hag enn he gloar ez eo bet savet
 Iliz-Katredal kear Florans.

Enn Iliz Plabennec, e Leon,
 He relegou a zo miret
 Hag e miz gouere d'ar Pardon,
 Gant henor e vezont doughet.
 Deskomp ama, encou kristen,
 Enn drouk n'e zentimp oc'h tud fall,
 Ha senti oc'h Doue hiviziken,
 Pert abennag ve a hent all.

Holl, o veza ma'z omp kristenien,
 Omp galvet da zougen ar groaz,
 Holl e renkomp bez merzerien

A galoun, pa n'ar be neb glaz.
E guirionez e ticmp beza
Merzerien, holl, var ann douar,
Ma fell deomp enn env jouissa,
Gant ar vezerien, euz ar c'hloar.

Neket red, evit beza mezer,
Mervel en eur skuilla he c'hoad,
Mes gouzaon evit Doue a renker
Ar boan a erru da beb oad.)
Mes penaoz gouzaon evit Doue
Ann tan, ar c'hleze hag ar glaou,
P'on euz re nebeut a garante
Da c'houzaon eur gerik pe zaou.

Pedit Doue, o RAPAREA,
Da rapari hon encou,
Goulennit deomp ar c'hraz digantha
Da bratika ho vertuziou.
Hor zikourit gant ho relegou
A zo ganeomp enn hon tenzor,
Da vont ive gantho d'ann envou
Evit kaout perz enn hoc'h henor.

Amen.

Sant Sebastien ha Sant Rok

*Ton : Hor c'halon baour mantret
Gant glac'har hag enkre...*

SANT SEBASTIEN

DISKAN :

Aotrou Sant Sebastien
Patron ar zoudarded,
Petit Doue d'ho difenn
Vit n'a vint ket flastret.

1

Enebourien Bro-C'hall
'Zo kriz ha didruez !
Plijit don d'hon diouall,
En han' Doue truez !

2

Eveldomp c'hui a zo
Ginidik euz ar Frans,
Ha dre-ze tud hor bro
Ennoc'h o deuz fizians.

3

C'hui 'zo soudard Jezuz,
Skoazell ar Verzerien,
Bezit trugarezuz
Ouzomp-ni kristenien.

4

Dre vertuz ar birou
Oc'h bet gantho treuzet,
Pellait diouz hon eneou
Birou ann drouk-spered.

5

Sellit ouz ar c'hlanvour
A c'houlenn ar iec'hed,
Roit dezhan sikour,
C'hui zo treac'h d'ar c'hlenved.

6

Kalz, gant ann *obuzou*
'Zo blesset, pe lazet !...
Diouallit en *trancheou*
Hon paour keaz soudarded.

7

Aotrou Sant Sebastien
Hastit da zigeri

Var ar brizounerien,
Ha mont d'ho c'honzoli.

8

Goulennit digant Doue
Lakât fin d'ar vrezel,
'Vit ma teuint adarre
D'ar gear heb dale pell.

9

C'hui dre ho meritou
A c'hell kaout evidomp,
Digant Doue hon Aotrou
Ar c'hras a c'houlennomp.

SANT ROK

1

Evel Sant Sebastien
Eo gallouduz Sant Rok,
Ar vosenn ann dersienn
A dec'he enn he raok.

2

Dre zin ar Groaz hebken
'Barz enS hospitaliou

E torre ann dersienn,
E tousea ar poaniou.

3

Pedomp-hen da gas pell
D'ouzomp ann teir goalenn
'Vel ma zeo ar yrezel,
Ar gernez, ar Vosenn.

4

Ar barrez-man, — Sant Rok, —
'Zo bet ato guechall
Diouallet mad ganeoc'h,
Kendalc'hit d'he diouall.

Amen.

Kantik ann Iliz

Tom : Pec'het am euz ha Kalz pec'het.

Pegen douz eo, Doue santel,
Beva e skend ho tiouaskel (*bis*) (1).

(1) Cf. Ps. 83. Quam dilecta.

Tridal a ran enn hoc'h Iliz.
Ha va c'halon a lamm em c'hreiz.

Enn hoc'h Iliz pell'zo savet,
Evelato eo Kaër meurbet.

Enn hi dirag he aoteriou
Doue a ro deomp he c'hrasou.

Ar pillerou, nerzus ha teo,
A zo henvel ouz guez dero

Dindan ar beac'h ne blegint ket,
Choum a rai sounn ho fenn kalet.

Tridal a ran enn hoc'h Iliz
Ha va c'haloun a lamm em c'hreiz.

Va c'haloun baour ma lammit mui,
N'euz ken a nerz em izili.

Evel ar c'hoar dirag an tan,
Dirazoc'h; Jezuz, e teuzan.

Ann durzanel, ar guennili
Ho deuz eun neiz da c'houkori.

Da c'houkori ho eünigou,
Gant aoun na varfent gant ar riou.

Hoc'h aoter zakr, Krouer ar bed.
Setu va neiz muia karet.

Euruz ar re a vez ato
Enn-enn o veuli hoc'h hano.

Enn draonien-ma leun a c'hlaç'har
Nag euruz eo an nep ho kar.

Euruz ann hini voar eo paour
Hag a c'houlenn ouzoc'h sikour.

Euruz ann den a glask bembez
Ober guelloc'h ho polontez.

Euruz, euruz, mil guech euruz,
Her goût a ran, o va Jezuz.

Rak eun devez enn ho kichenn
A dal kant vloaz ha kant ouzpenn.

Va aliou diveza

Va c'henvroiz,

En eurgloza al leorik-man, e lavarin d'hoc'h
Komzou ann Aabostol sant Paol d'ann Hebreed,
guechall; (*Hebr. 13*). « Va breudeur, emezhan,
« dalc'hit sonj euz ar bastored pe ar veleien o deuz
« prezeget d'hoc'h Komzou Doue, ha pa velit pe-
« naoz o deuz tremenet ho buez, heullit ho feiz. »
« Jezuz-Krist a iva deac'h, a zo hirio hag a vezo

« varc'hoaz, arabat eta beza o chenj kreden evit
« heulia divroidi. Sentit gant doujans ouz ho pas-
« tored; hint a glask mad hoc'h ene, rak, da Zoue
« erankint renta kount anezho. »

Evedoc'hui, va c'henvroiz, n'opeuz ket a leac'h
gaout aoun da fazia; rak, lavaret a c'hellit gant
ar c'hatekiz: gonzout a ran e ma'oun er gwir Iliz,
abalamour va fersoun azo a-unan gant ar Pab, penn
ann Iliz Katholik, ha dre-ze oun sur doc veza var
ann henn mad.

Setu aze kreden ho tud koz, a zo sonj anezho
c'hoaz enn ho tiegeziou. Diskouez a rejont ount
bugale sentuz d'ann Iliz Katholik, pa deuaz ar Re-
volusion-vraz. Tec'het a readt dioc'h ar veleien
chismatik, hag e risklent ho buez evit kuzat ar ve-
leien chismatik, hag e risklent ho buez evit kuzat
ar veleien a ioa chomet fidel, abalamour n'oa
nemet ar veleien-ze hag a c'helje maga ho eneou
dre ar zakramanchou. Komprenit dre eno peger
krenv oa ho feiz! Hogen, ar feiz-ze eo kaëra tenzor
oc'h euz bet digantho enn heritach.

Trugarekañt eta ann Aotrou Doue, Kenvroiz, euz
ar c'hras en deuz great d'ehoc'h, da c'henel ha da
yeza savet enn eur vro hag a zo, evel pa lavarfen,
Katholik betek mel he eskern, euz ar c'hras en deuz
great d'ehoc'h da veza bugale d'ar gwir Iliz, n'euz
silvidigez ebet er meaz anezhi.



PLABENNEC

Karit hoc'h Iliz hag ho pro,
Neuze netra d'echoc'h ne vanko.
Mes, n'e dit ket divar ar meaz
Da vrabansi d'ar c'heariou braz.
Eno 'foraner ann danvez
O klask kurgat ar baourentez,
Ar feiz kristen a vez ive
E riskel braz da ober pense
Chomit'ta tost d'hoc'h iliz koz
Hag enn he c'hichen d' repoz
Neuze' peze eur gurunen
Ha gloar ar vuez-all heb termen.
Hag evelse gant ho tud koz
E viot euruz er baradoz. Amen.

Ar C'hleiër

*Ar c'hloc'h braz a boëz 2000 lur. An eil, 1350.
Ann trede, 1100. Ar pevare, 680. Kloc'h Loc Maria
312 lur.*

Tom : Sellit piz ouz ann taolennou.

1

Sonit bennoz ha meuleudi
D'hor Zalver Jezuz, da Vari,
Pa ho klevint tud ar barrez
Oll a bedo gant levez.

2

Sonit gant ho moueziou lirzin
Ann *Angelus* dioc'h ar mintin,
Da greisdeiz, ha d'ar pradaez,
Ma teuimp da veuli ar Verc'hez.

3

D'ann oferen, d'ar gouzperou
Galvit ann dud a vandennou,
Galvit ive, d'ar chatekiz,
Ar vugale leiz ann iliz.

4

Sonit, Sonit var ar c'havel,
Sonit badiziant ar bugel ;
Sonit gant levenez ha joa
Da zeiz santel ar pask Kenta.

5

Sonit, sonit d'ann eureujou,
Lavarit d'ann holl briejou :
« Bevit, bevit e gras Doue
« Ha savit mad ho pugale. »

6

Pa gas arbeleg he Zoue,
D'ar c'hlanvour Keaz var he vele.
Sonit klemuz he angoni
Ma teuor evithan da bedi.

7

Sonit ive glaz ar maro,
Lavarit d'ann holl dud er vro :
« Pedit, pedit a vir galon,
« Pedit evit ann andon. »

8

Sonit p'hor bezo levenez,
Sonit c'hoaz p'hor bezo enkrez.
Ho mouez-c'hui azo mouez Doue,
Vad a ra bepred d'hon ene.

(*Meulet ra vezo Jezuz-Krist*).

Belein euz barrez maro abaoe 1830

Ann. A. Gouëz euz Kergiabo, persoun e Lesnevin e. . .	1830
— Bris, bourg. Vikel-Vraz, Kemper.	1835
— Abivin, Lanuel, Kure Kemper.	1828
— Bleuven, Kerleanoc, Kure Plouvorn.	1844
— Cloarek, ann Enez, persoun Plouarzel.	1858
— Brun, Kernon, persoun Plouarzel.	1872
— Y. Kerjean, ann Enez, persoun Elliant.	1871
— J.-M. Bris, bourg, 25 bloaz, eur bloaz beleg. . . .	1881
— Siou Koz, Kergoallou, persoun L.-Maria-Plouzane. .	1883
— Siou, Kergoullou, he gure.	1872
— Laot, Kergoallou, he gure.	1880
— B. Lallemand beleg, var vor, euz ar bourg Brest. .	1884
— Ch. Dare, Kergiabo, Kure, Mahalon.	1892
— Kerjean, Penn-ar-vali, persoun Kersent.	1879
— Y. Guivarich, Ruguel, persoun Sant-Servez. . .	1886
— G. Morvan, Tremeur, Chaloni Kemper.	1886

Kalz leortou brezonek en daa great, setu perak eo merket ar c'homzou-mâ var he vean bez :

« Goude m'eo maro,
 « Pell c'hoaz e Komzo,
 « Keit ha ma vo e Breiz
 « Brezonek ha Feiz. »

— J.-M. Magadur, Gouliou-braz, hospital, Brest. . .	1903
— G. Colin, bourg, Kure Sant-Thegonnec.	1907
— J.-P. Kersimon, bourg, rejant Seminer Kemper. .	1868
— J.-M. Kersimon, bourg, persoun Ploumoger. . . .	1911
— J.-M. Billon, chaloni, persoun Plabennec.	1917
— J.-M. Kerbrat, Enez, persoun Guipronvel.	1917

Evit Kloza

Ton al lochen :

Setu echu al leor dister
 Great' vit gloar Jezuz hag ar Verc'hez,
 Pliche gantho hen digemer,
 Hen digemeret gant trugarez,
 Evidon da veza eur pec'her
 Em euz fizianz enn ho madelez.

Em gwele douar pa vezin
 O repoz e gwered Plabennec
 M'ho ped da gaout truez ouzin
 Intron-Varia, Guerc'hez galloudek,
 Chui mignoured deuit affo
 Var va bez da ober eur beden,
 Neuze Doue a bardouno
 D'ann distera euz ar veleien
 Ha d'am ene paour a roio
 Joa ar Baradoz da virviken (bis).

Lavarit ann *De profundis*
 'Zo peden truezuz ann Iliz :
 « A greiz dounder va fec'hejou
 « Em beuz kriet ouzoc'h va Aotrou
 « Aotrou, Aotrou, bezet truez,
 « Klevit, va Doue, ouz va mouez !!! »

G. V. ar YAOUANK, belek.

Mearet Plabenne

Goulveu Jestin euz a Zant-Erep oue ar c'henta gonde ar Revolution. Ar chousekvet, Ian-Loïz Moal euz ar Roz-ar-Vern, eno e oue savet ; pa deuaz da veza mear e tenaz da jom d'ar bourg el leaëh ma varvaz er bloaz 1891, oajet a 86 bloaz, Espad 45 bloaz oa bet Mear er barrez-mà, hag en doa great aleiz a draou mad hatalvoudek epad ann anzer-ze. Er bloaz 1847 e Kemeraz archerien hag eur *Garde* evel breman. Goude-ze e savaz eun ti-Kear. Er bloaz 1851 e savaz eun ti-skol d'ar baotred. Er bloaz 1856 e lakeaz ar beorien var ar roll, evit miret da veza bemdez o c'haloupat da glaek ann aluzen. D'ar mareou-ze en doa ive deja great ann darn — vuia euz ann henchou braz a za dre ar barrez. Er bloaz 1867, ann Impalaër Napoleon III, oveza gouezet ar vad en doa great abaoué m'edo enn zervich, a roaz deshan ur groaz a henor,

Goude Loïz Moal, e teeuz Julien Breton euz ar Botfao, Jaoua Fagon euz Kerangueven. P. Briat euz ar bourg, Anton Morvan euz ar Vourc'h-vian. Ar mear 'zo breman eo Perr Jestin ginidik euz ann Drennec hag euz a famill Jestin Sant-Erep. Gras dezhan da veva koz, ha da genderc'hel da ober ar vad en devz great hag a ra bepred. Amen.

Ar *Juge-de-paix* Kenta, oue ar *Mao* euz Keroriou.

Ar c'hordennadou

Seiz Kordennad'zo er barrez :
Al Leuan, al Lann, hag an Arvez,
Loc-Maria, ha Lezkelen,
An Damani, ar Bourg ouzpenn.

1. Bourg :

Tregars, Penker, Bod-onn Santel,
Ty-ruz, Roz-ar-vern, Ruberel
Kot-an-abad, Ravean, Lannik,
Toulchuibu, ha Kroaz-ar-zantik.

2. Leuan :

Landouardon, ha Poull-tousek,
An diou Gosker, Killevarek,
Keravezen, ha Kergorrik,
Penn-ar-Choat, ha Kroas-Stephanik.
Ar Gernevez-Keravoy,
Kreac'h-ar-Vouden, Kroaz-ar-Merdy,
Kallak, ar Vouden, ha Prat-lein,
Ar Roc'h-laz, hag an Tyez-mein.
Milin-ar-Vouden, ar Pors-guen,
Toull-al-Lutin, Keruzaouen.
Poull-Marc'h, Kerfelgar, ha Kerskao.

Poull-ar-C'hanab, hag ar Bot-fao.
 Pentref, Guennou, ha Keraëret,
 Kreac'h-Kuden, Traon-leac'h, Pontanet.
 Kerbirjou ha Begavel,
 Gorre-Kear, Kervili, Voansel,
 Kerangeven, ar Prat-ledan,
 Tremeur-vraz, ha Tremeur-vihan,
 Al Leuan, ha Kerguiabo,
 Ar C'houevrok, ha Kerilio.

3. Lez-Kelen :

Kersene, Sant-Erep, Rugel,
 Menez-Dialaez, Begavel,
 Keradraon, ha Lezoudestin,
 Lanveur, Kefuruz, ha Gourin.
 Ar Gouliou-braz, ar Gouliou-bihan,
 Ann Traon-braz, ha Kermoisan.
 Kerineuf, Treller, Kerverzid,
 Kerleanoc, ha Traon-David.
 Penn-Ank, Prat-ar-Goff, Kerhuon,
 Kerzrein, Poull-Guillou, Taragnon.
 Kersevenien, Kergouan,
 Kosmogrou, ha Kervorvan.
 Kerbrijant, Mendy, Kergelen,
 Kleongar, ar Zal, ha Lez-kelen.
 Kervranik, Stank-alan, Roudouz,
 Routier, Goarem-Greiz, Gourlean,

Ar feunten-goat, ha Herverien,
 Begavel, hag ar feunten-venn,
 Ar Gernevez, hag ann Enez,
 Keradraon-bihan, Goueled-enez.
 Kerangall, hag ar Groaz-prenn,
 Keronars, hag ar Vilin-venn.

4. Arvez :

Ar Vourc'h-vraz, ha Penarvaly,
 Ar Vourc'h-vihan, ha Roudoulevry,
 Kerlaeron, Borepoz, Arvez.
 Kereoret, Kreac'h-an-Arvez,
 Kerlann, Kergollou, Hersalic,
 Roudouz, Lann-ruzik, Evlec'hen,
 Kersulgant, ha Keralien
 Kervaziou, ha Killien,
 Ann Traon-bihan, ha Lannhuel,
 Kerzeniel, Keregar, Kerhuel,
 Lannoster, ha Lonorven.

5. Lann :

Kerargon, Skaven, Kervenguy,
 Kernoaz, Toull-ran, ha Kistilly,
 Kerjestin, Leslevret, Kergrenn,
 Ann Enez-vihan, ha Kerguenn,
 Enez-Kergrenn, ha Kelerou,

Ar C'heun, Corc'hear, Kerbrat-Guenou.
Enez-Guenou, ha Beskelen,
Pont-Loïz, ha Sant-Julien,
Kroasant-ar-vugale, Ker-Iann,
Mendy-Guenou, Kergoat, ar C'hrañn,
Lann-ar-c'heun, Ty-taouarc'h er fin,
Hag ann Ty-nevez, e Kerlin.

6. Damany :

Kerveguen, ha Keroriou,
Kerstrat, Kerdanne, Kergvallou,
Boscadec, Kerc'hleuz, Keroue,
Kervillarm, Krugel, Sant-Klaoue,
Ann Enez-griz, ar Moguerou,
Streat-C'hlaz, Kerc'halz, ar milinou.

7. Loc-Maria :

Loc-Maria, Sant-Evilin,
Maner ar Best, hag he vilin,
Ann diou Gerc'halz, ha Lanverc'her,
Ty-Glaz, Ty-Corn, ha Kerever,
Kerbrat, Traon-Edern, Senanchou,
Kerkaos, Krejestin, Kerlichou,
Kerangof, Guelekear, Pellann,
Kerautret, ha Kerarouan.
Kergaraok, Taule, Koz-vilin,

Kespdivit, Pont-ar-Rousin,
Kallak, Kergoanton, Prat-ar-groaz,
Kerc'hreaih-vian, ha Kerc'hreac'h-vraz,
Pont-Eozen, Kergoëledik,
Kerveur, Koat-alek, Vilarik,
Langervadek, Sklus, Kergoadou,
Bodilio, Kergov, ha Loihigou.

Ar milinou : 27 :

Milin ar Vouden, al Leuan,
Milin-ar-Pont, milin-vihan,
Ann Traon-bihan, Roudoulevry,
Ar Geradraon ; hag ar mendy
Lanoster, hay ar Vilin-venn
Kistilly, ha Sant-Julien,
Milin ar Rest, ha Keroue,
Milin Kerc'hals, ha Sant-Klaoue,
Diou Bontanet, Pentrev, Guennou,
Sklus, Guelekear, Senanchou,
Kergaraok, ha Pont-ar-Rousin,
Milin Taule, ar goz vilin.
4 milin zeac'h "zo bet :
El Leuan, er Bourk,
E Loc'higou, en Arvez.

Canton

Ar ger Forest guechall e Talamon Landerne, a ioa eur c'hoat braz divent, hag en em skigne dre voeled Forest, Brest ha Plabennec. Hanvet oa goëled Forest abalamour m'edo er penn izela, Brest oa ar penn moana hag a sinifi Bec-rest, da lavaret eo bec-forest. Plabennec eo ar penn-huela, setu perag eo hanvet Pla benneat, Pla benn ea c'h, Plabennec'h, hag a sinifi penn an ea c'h, ac penn var laëz, pe huela.

E. Plabennec ez euz 3.827 den. Er chanton euz bet 12 parrez hag a ioa ennhan etre tout vardro 13 mil den ha 40.000 devez arat. Mes er bloaz 1892 e oue staget parrez Treouergat ouz kanton Guitalméze.

FIN

A la même librairie : Prix, 1 fr.

Burzudo c'hoarveet er c'hanved zo o Ren,
Fransois Makary, amunuzer er Ger a Lavour.



TAOLEN

	Pajen
Gwechall-goz	6
Bro-Zaos.	6
Kantikou S. Tenenan	10-34
Kenta Pastor	38
Ar Révolusion.	39
Kimiad, A. Jestin.	40
Glac'har Plabennec	47
Persouned	49
Chapelou.	52
Lezkelen (Kantik).	54
Loc-Maria	58
Lanorven.	61
Kroasiou.	63
Da santez Anna	65
Va zarmoun genta	68
Santez Barba.	72
Relegeier	73
Santez Raparea	74
Sant Sebastien	81
Sant Rok	83
Kantik ann Iliz.	84
Va aliou diveza.	86
Ar c'hleier.	89
Beleïn euz barrez maro abaoe 1830	92
Evit Kloza	93
Mearet Plabenne.	94
Ar c'hordennadou.	95
Canton	100